

YF_0060_Son ar wezenn dero

D'ar seitek a viz Here, eizh ha pevar-ugent
Oa dihunet ar vro-man, glac'haret strafuilhet.

War-dro deg eur diouz an noz, savet eur gorventenn
Eun avel ken dirollet, oa bet biskoazh gwelet

Diouzh pep korn a Vreizh-Izel, diouz Gwened da Sant-Brieg
(Na) 'vez gwelet 'med gwez pilet, toennou dismantret

Stanket oa bet an henchou ha trohet ar goulou
Biken den na zisonjo, ken mantruz he roudou.

Ar wenn dero a oa korn va liorz, kozh a meur a gantved
Gwriennet don en douar, meur a zarvoud bevet.

Disheoliet gant e skourrou, karradou melchen glas
Pe evezhaet ar peizant, an hanv o tiskuizan.

Neizhiou pig ha neizhiou bran, pe c'hoazh morzevelled
Kuzhet en he deliou stank, bep bloaz veze kavet

Ranket m'oa tap' va fuzuilh 'pad an adlodennan
Ha chom harp ouzh e gorf krenv evit e espernan.

Blenier an tourter melen, daoust 'ma oa diskiant
En-doa asantet dre red, d'am nerz kalon plegan.

Eun dudi d'am daoulagad, eun diskuiz d'am spered
Kaeran boked eun atant a zo breman astennet

Gourvezet war al liorz, e gwrizio dizouaret
Evel ar marc'h beg nerzhusan, skoet gand ar c'hlenved.

Gwasket mad oa va c'halon, ha gleb ma daoulagad
Red e vo din e heskennan, diskouran, fagodan.

A-raog kregin gant al labour, m'eus touet dirazan
Vije graet gand e gorf eeun plench tev da gizellan.

Graet vo ganto taoliou hir, arbilli kizellet
Evel-se e vevo c'hoazh e-touesk ar Vretoned.

Gwel a raio fulu an tan, 'nijal ouz an oaled
Klevoud 'rai kontadennou, kan ha komz brezoneg

Sur 'walc'h en do plijadur pa zeuio eur plac'h vrag
Da flouratan gand koar gwenan kalon ar wezenn dero

E skourrou, e begachou a dommo va daouarn
Pa zeuio ar skorn, an erh da holoin an douar.

(Vit) kenderc'hel gant ar vuhez e heuilhin al lezenn
Ret eo lakaad en he 'flas, ur blantenn d'ober gwe'enn.

Setu m'eus tapet va 'fal, douaret eur blantenn
Dibabet m'oa unan yac'h, digamm ha gwrienneg.

Gant ar spered-se breudeur, 'chomo bev ar vro-man
War hon lec'h savo tud all da stourm ha da ganan

Ar blantenn a deuio da wenn hag ar bugel da waz
Gand ar skouer vad a vo roet, Breizh a vevo da viskoaz.

Yann DINASKET